

D'ar 15 a viz C'hwevrer

- Er bloaz a c'hras 95, merzherenti **sant Onesim**, diskibl sant Paol. Hag eñ sklav tec'het diouzh ti e vestr Filemon e voe degemeret gant sant Paol en badezas hag a fizias ennañ ul lizher evit e vestr o c'houlen e vefe dieubet ha degemeret evel ur breur. Hervez an hengoun e vije bet merzheriet e Roma.
- E 122, e Brescia e Lombardia, merzherenti **ar sent Faustin ha Jovid**. Daou vreur e oant, unanet en hevelep feiz gredus. Goude bezañ diwasket meur a stourm evit dougen testeni d'ar feiz da vare heskinadeg Trajan e voent lakaet d'ar marv da vare Adrian.
- En III^{de} kantved, merzherenti **sant Major Gaza**, merzher. Soudard e oa e gwarnizon Gaza pa voe diskuliet evel kristen. Gwialennet e-korf seizh devezh e varvas divrall o c'hourbann e feiz.
- E 1682 e Paray-le-Monial, **sant Klaoda de la Colombière**, beleg, jezuist, kofesour santez Mac'harid-Mari. Lakaat a reas e holl c'hred da astenn deolietzh ar Galon Sakr. Kaset da Vro-Saoz evel chapalan dugez York, e voe argaset ac'hano hag e tistroas da Lyon ma varvas d'an oad a vloaz ha daou ugent.
- E 1975, **ar gwenvidig Michał Sopoćko**, beleg, kofezour santez Faostina. Ganet e 1888 e voe urzhiet beleg e 1914 ha graet doazhour a zoueoniezh e 1934. Pa oa kofezour Kengredadur Itron Varia an Drugarez e kejas gant santez Faostina en e gendrec'has da skignañ kehelerezh an Drugarez Santel. Goude marv hounnezh e kendalc'has daoust d'ar berz embannet gant Roma e 1958. Santelezh et eo bet e Białystok e 2008.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Laouenan pe Lowenan**, manac'h, anavezet evel sekretour sant Tudual ha diskibl sant Paol Aorelian.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Dokou pe Docco, pe Toc'hou**, Iwerzhonad a orin, diazeour ur manati e Kernev-Veur a voe gweladennet gant sant Samzun.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Berek** (Iw. Bearach), manac'h, diskibl da sant Kuñvi e Glean Dá Loch (*Glenn an Div Loc'h*) hag abostolour ar feiz e hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h).
- E 590, en Iwerzhon, **sant Faranan**, penitiour. Mont a reas da vanac'h dindan sant Koulmkell en enez Iona a-raok distreiñ d'e vro ha ren ar vuhez penitiour en Allernan lec'h ma varvas.
- E 959, **sant Koulman**, penitiour e Ghent e Belgia e-kichen iliz Sant-Bavon.

D'ar 16 a viz C'hwevrer

- En III^{de} kantved, e Nikomedia, merzherenti **santez Juluanna**, gwerc'hez. He zud he gouestlas en dimeziñ da brefed ar gêr, hogen e voe harzet en abeg d'he feiz ha barnet d'ur marv kriz gant he danvez-pried e-unan a c'hadorie al lez-varn.
- War-dro 312, en Egipt, merzherenti **sant Elia hag e geneiled, ar sent Jeremias, Samuel ha Daniel**. Dibennet e voent goude bezañ bet jahinet kriz gant ar prefed Firmilianus war urzh an impalaer Galerius Maximianus tra ma'z aent da weladenniñ kristenion bet kondaonet da labourioù-ret e mengleuzioù Silisia. War o lerc'h e resevas ivez kurunenn ar verzherion **Pamphil**, beleg, **Valer**, diagon e Jeruzalem, **Paol**, genidik eus Jamnia, **Porphyr**, gwazour Pamphil, **Seleucus** eus Kappadokea, **Theodul**, kozhiad eus tiegezh ar prefed Firmilianus, ha **Julianus** Kappadokea a

zegouezhas d'an ampoent, a bokas d'ar verzherion, ha, bet diskuliet d'e dro, a voe kondaonet da vezañ dêvet gant tan izel.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, distro da Zoue ene **sant Varzhin**, diskibl sant Gwennole, keneil sant Biavili er Faou e Kernev.

- En Iwerzhon, **sant Roibhne**, abad.

- En Iwerzhon, **sant Aongus** (Unost), eskob en Iwerzhon.

D'ar 17 a viz C'hwevrer

- War-dro 440, **sant Mesrob**, manac'h, doazhour an Armeniz. Da gentañ milour ha da c'houde uhelgargiad e palez ar roue, ez eas da vanac'h. Sevel a reas ul lizherenneg evit skrivañ an armenianeg. Neuze e kevyezhas ar Bibl er yezh-se hag e savas meulganoù.

- E 449, **sant Flavian**, uheldad Kêrgustentin. En Efezos e voe gwallgaset dre ma tifennas ar gelennadurezh katolik. Skoet gant dalc'hidi Dioscorus an dizeol e varvas nebeut amzer goude war hent an harlu.

- Er XIV^{vet} kantved, **ar Seizh Sant, Diazezhourion urzh Servijerion Mari**, pe urzh ar Servited,, Aleksis Falconieri ha c'hwec'h marc'hadour all eus Firenze a zivizas dilezel o madoù evit ren ur vuhez pediñ er c'hoadeier. En em lakaat a rejont e gwazerezh Mamm ar C'Hrist, er bedenn hag en abostolerezh.

- E Breizh, e 547, distro da Zoue ene **sant Gireg (pe Gevrog)**, abad iwerzhonat. Hervez lod e vije bet diskibl sant Tudual ha keneil da sant Paol Aorelian, savour ur minic'hi e Lokireg ha penitiour e Plouzeniel, marvet e Landerne. En Oksimor hiziv Kastell-Paol e savas ur chapel d'ar Werc'hez lec'h m'emañ bremañ iliz-chabistr Itron-Varia ar C'hreizkêr bet savet kaer gant an Dug Yann Voñforzh.

- Koun eus **sant Ingar ha sant Milon** diskibled sant Gireg.

- En Iwerzhon, war-dro 450, **sant Loman pe Luman**, diskibl da sant Padrig. Hag-eñ kentañ eskob Baile Atha Truim e kontelezh Meath en Iwerzhon. Bez' e vefe mab santez Tigrid, c'hoar sant Padrig, pe mab santez Darerc'ha, he c'hoar dimezet gant Konan Meriadeg. Sant Forchern hag en doa badezet a voe e warlerc'hier war sez Truim.

- En Iwerzhon, e 603, **sant Fintan** (Gz. Fionntan), abad ha feizvonnour, Ozac'h menec'h Iwerzhon. Diskibl sant Koulmkell abad Iona e voe abad Clúain Eidhneach en Iwerzhon. Evit e ziskibled e skrivas ur reolenn askezek-meurbet a veze kempouezet gant an uvelegezh hag ar guñvder a ziskoueze da bep hini. Sellet e vez outañ evel unan eus tadoù ar vanac'helezh iwerzhonat.

- E Breizh-Veur, e 661, **sant Finan Lindisfarn**, eskob.

Genidik eus Iwerzhon ez eas da vanac'h en enez Iona lec'h ma talc'has d'an hengounioù kelt. Kanttreiñ a reas Sigeberht II roue Essex ha Peada roue Mersia. Diuzet e voe da eskob Lindisfarn e 651, war-lerc'h sant Aezan.

D'an 18 a viz C'hwevrer

- E 106, merzherenti **sant Simeon**, eskob Jeruzalem war-lerc'h sant Jakez. Dre ma oa kar da Jezuz, e veze graet anezhañ "breur d'an Arloz." Aozañ a reas kuitadeg kumuniezh kristen Jeruzalem e-pad sezis ar bloaz 70. Eñ avat a voe kroazstaget gant ar Romaned.

- E 354 e Roma, **santez Constansia** hag **ar santezed Attiqua hag Artemia**, gwerc'hezed. Constansia, merc'h pe nizez an impalaer Kustentin, dre ma veze taget gant un angreizh a aloube tamm ha tamm he c'horf a-bezh, a yeas da bediñ war bez santez Oanez. Eno en em roas da huniñ hag e klevas ur vouezh o lavarout « *Kredit e Jezuz Krist hag e viot pareet.* » Pa zihunas en em gavas pareet. Da c'houde e voe goulennet e dimeziñ gant ur jeneral eus arme an impalaer. Nac'hañ a reas hag ez eas da chom e-kichen bez santez Oanez gant Attiqua hag Artemia, merc'hed ar jeneral.

- E 806, **sant Tarasius a Gergustentin** (Gl. Taraise), eskob ha feizvonnour. Uhelgargiad da vare an impalaerion ikonoklast e voe dibabet gant an impalaerez Irena a felle dezhi lakaat an den-se, desket ha deol-meurbet, e penn Iliz Kêrgustentin. Resevet gantañ an urzhioù sakr e voe diuzet da Henaour hag e kadorias e 787 Eil Senez Kêrgustentin a adsavas kehelerezh an ikonennou. Goude an trec'h-se en em ouestlas da zegas ar peoc'h hag hag an unaniezh en Iliz.

- E 1455, e Roma, **ar gwenvidig Yann a Fiesole lesanvet "Fra Angelico"**, beleg eus Urzh ar Brezegennerion, livour. Ezteurel a reas dre al livadur frouezh e arvesterezh evit uhelaat spere an dud davet traoù an neñv.

- E 1879, e Neverdun (Nevers) e Burgondia, **santez Bernadetta Soubirous (C'hoar Maria-Bernez)**, gwerc'hez. Ganet en un tiegezh paour eus Lourda e bro-Vigourdan (Bearn) e voe gratet dezhi, pa oa 14 bloaz, emziskouezioù ar Werc'hez Vari en em roas da anaout evel an hini krouet dinamm. Goude an darvoud-mañ hag an trevell a c'houzañvas diwar-se ez eas da leanez e Kenvreuriezh C'hoarezed ar Garitez hag an deskadurezh kristen e Kêr-Neverdunlec'h ma chomas kuzhet o vevañ penn-da-benn diouzh ar c'hemenn he doa degemeret digant ar Werc'hez.

- E Breizh, er ^{vet}VII kantved, **sant Riwan**, manac'h, diskibl ha keneil sant Maloù.

- Er ^{vet}VII kantved, **sant Yuniog** (Nioreg), m'eo bet roet e anv da barrez Sant-Ineg e Bro-Sant-Brieg.

- En Iwerzhon, e 676, **sant Kolman**, da gentañ manac'h en enez Iona ha da c'houde abad Lindisfarn. Reiñ a reas e zilez e 654 pa voe adreizhet e abati da heul sened Whitby hag e tistroas da Iwerzhon.

D'an 19 a viz C'hwevrer

- E 286, e Roma, merzherenti **sant Gabinus**, beleg. Breur d'ar pab sant Caius ha tad santez Suzanna, e voe karc'hariet e-pad pell amzer da vare Diocletianus hag e varvas evit ar feiz.

- War-dro 450, **sant Quodvultdeus**, eskob ha feizvonnour. Edo e penn Iliz Kartaga pa voe aloubet ar gêr gant Genserig, roue ar Vandaled. O vezañ ma ne zeue ket hemañ a-benn da lakaat an eskob hag e gloer da nac'hañ o feiz e kasas anezho kuit war vagoù dic'houel ha diroañv, darev da vont d'ar strad. Douarañ a rejont avat nepell diouzh Napoli lec'h ma varvas evel feizvonnour kalonek ar feiz.

- **Kenkounadur Merzherion Santel Palestina**, lakaet d'ar marv e 507, en o zouez menec'h a voe lazhaedet gant ar Bersed, en o fenn Alamundar.

- E 682, e Benevento e Campania, **sant Barbad**, eskob ha feizvonnour. Kendrec'hiñ a reas al Lombarded hag o ziern da zilezel o brizhkredennoù ha da zegemer ar feiz kristen.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Tiernvael**, eskob e Leon, diskibl sant Paol Aorelian.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Gall**, penitiour beleg e Breizh.
- En Iwerzhon, war-dro 452, merzherenti **sant Odran pe Oran**, mevel sant Padrig. Reiñ a reas e vuhez evit sant Padrig pa gemmas lec'h war e garr da-geñver un argad a-berzh riblerion.
- En Iwerzhon, e 708, **sant Maelgoran**, eskob Cill Dara.

D'an 20 a viz C'hwevrer

- War-dro 248, en Aleksandria, merzherenti **sant Serapion**. Da vare heskinadeg Decius e voe torret dezhañ e genvelloù ha da c'houde e voe taolet eus lein e di hag e varvas.
- E 342, merzherenti **sant Sadoth**, eskob Seleukia ha Ktesifon e Persia, merzher. Lakaet d'ar marv goude bezañ bet boureviet kriz war un dro gant 128 keneil, en o zouez beleion, gwerc'hezed gouestlet ha liked, e Beth Lapat, dre ma nac'hjont azeuliñ an heol.
- E 738, distro da Zoue **sant Eucher Orleañs**, eskob ha feizvonnour. Manac'h e oa en abati Jumièges e Normandia pa voe anvet eskob gant Karl Martel ha rediet gantañ da bignat war sez Orleañs. Da vare emgann Poitiers e savas e vouezh enep Karl Martel en doa laeret listri aour arveret evit al liderezh. Diwar-se e voe distaelet hag harluet e Kolun. Kavout a reas repu en abati Sant-Trond.
- War-dro 787, **sant Leon**, eskob Catania e Sikilia. Genidik eus Ravenna e troas kein ouzh madoù bras evit en em lakaat e servij ar C'hrist hag e Iliz. Deuet da vezañ eskob Catania e stourmas taer a-enep an idolouriezh hag e tiskouezas kalz a garantez evit ar beorion. Ken brudet e oa e radwerc'h a bareañs ma voe galvet da lez Bizantion.
- E 1920, e Aljustrel e-kichen Fatima er Portugal, ganedigezh en neñvoù **santez Jacinta Marto**. Dezhi, d'he breur Francisco ha d'o c'heniterv Lúcia, anezho tri mêsaerig, en em zisouezas ar Werc'hez Vari etre an 13 a viz Mae hag an 13 a viz Here 1917. Plac'hig leun a vuhez, e voe kannadez kalonek ar Werc'hez hag e varvas d'he zek vloaz oc'h en em ginnig evit distro da Zoue ar bec'herion. Santelezh et eo bet war un dro gant he breur Francisco d'an 13 a viz Mae 2017 gant ar pab Frañsez.
- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Lever** (Lt Leucharius, Gl. Eucher), eskob e Dol.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Kemerenn pe Ketomeren**, diskibl ha warlerc'hier sant Paol Aorelian a Leon, kehelet e Gregam e Bro-Ereg.
- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Bolc'han** (Gl. Olgan), eskob. Badezet e voe gant sant Padrig en kasas da studiañ e Galia. Deuet da vezañ eskob Derkan en Iwerzhon e savas eno unan eus gwellañ skolioù an enezenn.

- En Iwerzhon, war-dro 796, **sant Colgan**, abad. Hag eñ breur da santez Foila, mignon ar gwenvidig Alcuin eus abati Sant-Varzhin Teurn. Sevel a reas skol manati Clúain Mhic Nóis e kontelezh Offaly.

- E 1694, e Koad-ar-Roc'h war barrez Neant e Bro-Maoron en eskobiezh Sant-Maloù, distro da Zoue ene **Anna Toussaint de Volvire**, gwerc'hez. Hag hi diazevouez ospital Ploermael e ouestlas he buhez da Zoue ha da wazerezh he nesañ en ur chom er bed.

D'an 21 a viz C'hwevrer

- War-dro 338, distro da Zoue **sant Eustathe**, eskob Antiokeia. En abeg ma tiffenne ar feiz katolik da vare an impalaer Koñstans a oa a-du gant an ariaded, e voe harluet e Trajanopolis e Thras, lec'h ma varvas.

- E 379, ganedigezh en neñvoù **santez Irene**, gwerc'hez, c'hoar ar pab sant Damas ma skrivas eviti e levr a-zivout ar werc'hted.

- E 614, **sant Zakaria**, eskob, henaour Jeruzalem, feizvonnour. Pa voe aloubet ar Gêr Santel gant ar Bersed e klaskas en aner mirout na voe freuzet al Lec'hioù Santel hag e tougas warnañ relegenn ar Groaz Santel betek Persia lec'h ma voe harluet. Pa voe trec'het ar Bersed gant Heraclius e tistroas hag e lidas uhelsavidigezh ar Groaz Santel d'ar 14 a viz gwengolo 629.

- E 640, **sant Pepin Landen**, feizvonnour, dug Brabant ha maer palez roue Aostrazia da vare Kloter II ha Dagobert I^{añ}. Dimezet gant ar wenvidigez Ida Iduberga, ez eo tad santez Jertruda Nivel (17 Meurzh) ha santez Begga ha drezi hendad Karloman. Mignon e oa da sant Amand Maastricht. Gouzout a ouezas heuliañ ur vuhez santel e touez plijadurioù ha goubrenerezh kevredigezh e amzer hag e voe anvet "rener ar rouaned".

- E 1072, distro da Zoue ene **sant Pêr Damian**, kardinal eskob Osti, Doazhour eus an Iliz. Da gentañ penitiour, e skrivas buhez sant Romuald diazevouez ar venec'h kamadul hag e kanas meuleudi da gevrin ar vuhez digenvez e kenunaniezh gant an Iliz. Ugent vloaz diwezhatoc'h, diuzet da gardinal eskob kêr-Osti e skoazellas ar pab Gregor VII evit adreizhañ buhez ar gloer.

- E 1794 en Anjev, merzherenti ar **gwenvidig Noel Pinot**, beleg. Person e oa da-geñver an Dispac'h hag e nac'has touiñ da vBonreizh Keodedel ar Gloer. Harzet tra m'edo oc'h en em brientiñ da lidañ an oferenn e voe pourc'het dre c'hodiserezh gant e zilhadr oferenniñ pa voe kaset d'ar chafod.

- E Breizh, **santez Gwenn**, lesanvet *Teirbronn*, V^{vet} kantved, pried sant Fragan, mamm sant Jagu ha sant Gwezheneg, sant Gwennole ha santez Klerwi.

